

War ar skrammoù

Evel boaz e vo tu da welet goude an hañv nevezintioù zo evit abadennoù brezhonek ar skinwel. Setu d'an nebeutañ un tañva eus ar pezh zo tu da welet e brezhoneg abaoe miz Gwengolo.


COLUMBO E BREZHONEG

Goude aferioù *Distro Perry Mason*, eo enklaskoù al letanant *Columbo* a vo tu da (glask) heuliañ e brezhoneg. Urzh an eilmouezhiadennoù o vezañ disheñvel diouzh urzh ar skignadennoù, ne vo ket dre ret tu da glevet “*bepred e lâr ma gwreg din...*” e genoù Peter Falk. Gwirioù 68 film zo bet prenet gant TV Breizh. 17 zo bet eilmouezhiet gant ar gevredigezh Dizale evit ar poent. Tangi Daniel eo a ra mouezh an enklasker bepred gwisket gant e vantellc’hav, un tamm sigaretenn en e zorn. Ur rummad filmoù plijusoc’h eget re Perry Mason eo ha kalz brudetoc’h an haroz ouzhpenn. Lod eus ar filmoù kentañ zo bet sevenet gant tud evel Steven Spielberg, pa oant o kregiñ gant o micher.


DIGOR DIN

Tro hoc’h eus bet marteze d’an 23 a viz Gwengolo da welet emgav nevez France 3 Ouest roet d’ar vrezhonegerien, war-bouez re al Liger-Atlantel adarre. N’eo ket ur prantad ouzhpenn met rannet eo bet an abaden a oa a-raok d’ar Sul e div lodenn. D’ar Sadorn tro 10e30 e vo *Digor Din*, kiniget gant Corinne ar Mero. Eno e vo kaoz eus sevenadur : lennegezh, sonerezh, arzoù... Heuliet eo gant *Te ha Me* da 10e45. *Red an Amzer* a vo bepred da 11e30 d’ar Sul, met krennet un tamm neuze. Adkavet e vo Fañch Broudig evit kendivizoù diwarbenn danvezioù a bep seurt, politikerezh, armerzh, endro... Gwech ha gwech all e vo skignet un teulfilm brezhonek evit *Kroaz-hent ar filmoù*. E kornôg Breizh e c’heller evel-just kenderc’hel da welet keleier berr *An Taol Lagad* da 12e10, etre al Lun hag ar Sadorn.

Enez Black Mór



Kant biz kant giz.



Mouezh brezhonek Columbo (Peter Falk) zo hini Tangi Daniel (a-gleiz).

MOUCHIG-DALL HA JPL FILMS

Kenderc’hel a ra Goulwena ha Riwal da farsal evit brasañ plijadur ar vugale d’ar Merc’her beure, war-dro 9e. Un emglev kenbrodiñ zo bet etre ar chadenn publik hag an embregerezh roazhonat JPL Films, anavezet dreist-holl evit e filmoù bevaat. Tu zo da welet abaoe penn-kentañ miz Gwengolo, e-ser *Mouchig-Dall*, “Petra on?”, divnadelloù diskouezet teir gwech e-kerzh an abaden, ar respont dezho o vezañ roet er fin. “Bazz” zo un heuliad tresadennoù bev evit ar re vihanañ. Ur voutenn zu leun a virvilh hag o lammat e pep lec’h evit dizoloñ ar bed eo Bazz. Ur rummad a raio berzh sur a-walc’h eo “Kant biz, kant giz”, istorioù fentus gant margodennoù evel harozed, stumm manegoù ganto, advouezhiet gant Dizale.

TROIAD BLACK MÓR

Adkregiñ a raio Dizale gant e droiad e kêrioù Breizh evit skignañ tresadennoù-bev ha filmoù bet eilmouezhiet gant ar gevredigezh. Ar film bevaat *Enez Black Mór* a vo tu da welet neuze adalek miz Kerzu. Sevenet eo bet gant Jean-François Laguionie, a oa laouen-tre e vefe lakaet e film e brezhoneg. E penn-kentañ an 19vet kantved e tremen istor *Enez Black Mór*. Ur paotr 15 vloaz, Kid, a dec’h kuit eus un ti-emzivad eus Kerne, gantañ kartenn teñzor ur morlaer hollvrudet, Black Mór. Gant daou vorlaer ez a dre ar Meurvor Atlantel da glask war-lerc’h enezenn an teñzor, met ne dremen ket an traoù evel ma soñje dezhañ...